

Ar Skourr (Hañveg 1811 – Montroulez 1870)

Em hozni

War don : Iliz ma Farrez

(Telenn Rumengol, N° 2)

Em hozni, me garfe gweled
Tud Breiz-Izel oll unanet,
Oll o pedi an Aotrou Doue,
Gand eur galon hag eun ene.

Gweled ma breudeur ar Varzed,
Ma breudeur ger, oll unanet,
O kana war o zelennou
Da Vreiz or bro, pep seurt toniou ;

Gweled eet pell an teir gwalenn,
Ha bemnoz an neñv war or penn ;
Gweled eost mad leiz ar parkou,
Da rei d'ar paour a-zahadou.

Em hozni me garfe gweled
Bara, dour mad d'ar Vretoned,
Yehed ha joa ha buhez vad,
Ha karantez e pep tiad :

Gweled an oll vugaligou
Koant evel êlez an neñvou,
Yaouankiz fur ha tud a feiz
Hag ar re goz evel sent Breiz.

Em hozni me garfe gweled
Meuli ar Werhez venniget,
Gand braz, gand paour, gand pinvidig,
E kement to 'zo en Armorik.

Gweled euruz a-raog mervel,
Kement den 'zo e Breiz-Izel ;
Gweled ez eo Doue karet
E kement bro a zo er bed.

Em hozni me garfe gweled
E ve tud Breiz anavezet
'Vid tud a feiz, kaloneg, leal,
Evel ar zent, o zud gwechall.

Me 'grfe gweled Breiziz oll
O vond da bardon Rumengol,
Da Wengamp, Rostren ha Bulad,
D'ar Yeoded ha da Gelou-Mad.

Gweled Breiz, bro ma zadou koz,
War an douar, eur baradoz,
Eir baradoz roet gand Doue
Da hortoz Baradoz an Neñv.

Peoh, levez d'an dudou kêz
Etre 'n oll e Breiz karantez ;
Ar paour karet gand pinvidig,
Ar pinvidig gand reuzeudig.

Em hozni me garfe gweled
Banniel ar Feiz, ar Vretoned,
Savet war an touriou uhel,
Ha war menezioù Breiz-Izel ;

Uhellou evid an avel,
O lugerni war Breiz-Izel
Gand flammou tan warnañ skrivet :
“*Doue Breiz, ra vezo meulet !*“

Skrivet warnañ e skritur aour,
Ano an Itron Wir-Zikour,
Ano ar zent hag an êlez
War Breiz a daol evez :

Ar Vreyoned war o daoulin
E-barz kroaz ma Zalver divin
Kana : *Gloria in excellis !*
Da Jezuz ! Doue ha Roue Breiz.

Ar Skourr : *Barz an Itron Varia Rumengol.*

E Rumengol, d'ar 25 a viz Mae 869, deiz ar Pardon braz.

Notenn gand Embann an Hirwaz : Kristen penn-da-benn e oa Skourr, hag e felle dezañ konvertisa an oll re !